


ANN TRI MISION.

War don : *Elez eus ar barados....*

pe : *Santez Mari , Mamm Doue....* (N^o 49).



C'houi zo bepred , ma Doue , meurbed trugarezuz :
Ar c'hoant hoc'h euz d'hon salvi , dre groas ho map Jezuz ,
A ra d'ac'h monet warlerc'h ann danvad dianket ,
Daoust pegeid amzer ouzoc'h en dese enebet.

Me garje gant mouez ken krenv hag hini ar c'hurun
Kanan ar mad hoc'h euz gret aman epad taer zun
E parrojo Sant-Loranz , Kervorc'h , Landebaeron ,
Ho deuz , dre ho madelez , bet peb a vision.

Mes lezomp gand ann ele ann enor da ganan
Ar veuleudi dleet d'ac'h diwar ben kement-man.
Oll dud ann daer farrouz-ze zo deut fur evel sent ;
Daoust deze da vean mad , se oa ket diagent.

Hed taer zun en deuz poaniet ann Tado Jezuisted ,
A oa deut da ziskoue d'imp hend ar gwir joausded
A ro Doue d'ar galon , pa ye outan sentet ,
Ha pa rer evid he c'hloar kement mad a ve gret.

Tado Saus , Rot , Delaezир , deut eo ho tol da vat ,
Ni fell d'imp diwar-benn ze dont d'ho trugarekat.
Leiz ar galon hon euz keun euz ar pec'hejo gret ,
Hag ouz lezenno Doue pelloc'h ne stourmimp ket.

Gret hoc'h euz d'imp gwelet skler kaered ar zantelez ,
Ha pegen brav eo bevan enn urz hag er furnez.
Skler mad hon deuz bet klevet pegen fall eo pec'hi
Na pegen diboell ann den a riskl d'en em daoni.

Se hoc'h euz diskleriet d'imp , ha neuze hoc'h euz c'hoaz
Er skeul euz ar Baradoz diskouet c'honezek baz ;
C'honezek gourc'hemenn , larann , hag eo red ho miret ,
Re Doue hag ann Iliz , anez bean daonet.

Pegen skanv eo darn ann dud , na pegen troet fall !
Gand evez diouz ar re-ze eo red mad d'imp diwall.
Rak-se ta , mignonned kez , kenavo da viken :
Ma ne fell d'ac'h bean sur , breman n'ho heuillimp ken.

Kenavo , pep darempred noazus d'ann ineo ,
Gwal alio , skouerio fall , hale noz , kenavo.
Kenavo , lezourez , kenavo , meventi ;
Kenavo , kemend hellse hon lakat da bec'hi.

Teurveet , ô ma Jezuz , dere'hel mad em e'halon ,
Keit a vo huc ennou , graso ar mision.
Evidomp koz ha iaouank , pedet , Gwerc'hez santel :
C'houi , Ele mad , hon douget war lein ho tiouaskel.



Guengamp , e ty Cangny , traou al Levee.